



GWERZ SANTEZ TRIPHINA

HA

SANT TRÉMEUR

Patrouned deuz eur Barouz,

EN BREIZ-IZEL.



PEDEN D'ANN DAOU SANT.

Voar ann ton : *Gwerz Genovefa.*

Homp oll, a greiz hon c'halon,
 Hol. Hoar da Driphina, hon itronn!
 Ma. ez ha iaouank, tud a bep noad,
 Ha. Hoar da Drémeur, hi bugel mad!
 Bet

Ia, kanomp, betek ar maro,
Gloar d'hon zænt koz, ha gloar d'hon bro!
Voar an douar ma n'euz kersed
Tud a galon, tud biniget.

Enn eur c'hornik deuz Breiz-Izel,
Me well eur lec'h meurbet zantel :
Deomp, kristenien, deomp oll, gant joa,
Da weled douâr Triphina.

Aman, nin a gaw, Bretoned,
Bé Triphina, santez brudet,
Bé Trémour, hi bugel zantel.
Pébez tensor, tud Breiz-Izel!

Voar ann aoter, d'hon daoulagad,
Korf ar vam, korf hi bugel mad,
Enn eur laôur kaër a n'em disko,
Miret ouspen nao-c'hant vloa so.

Hervez lavar ann dud zantel,
Ebarz ann de kaër deuz hi gouel, (1)
Ar bleûn err park hac err c'hoajou
A c'hoarz n'eur sevel ho fennou.

Goaz kaër Blavez gant hi dour braz,
N'eur drikal o vont d'arr mor glaz,
A gann, gant ewned ann envou :
Gloar deoc'h, sænt Jezuz, hon autrou!

Voar ho be, nin oll daoulinet,
Dirak relegou biniget,

(1) Ar pardoûn a n'em gaw unan deus arr suliou
kenta deus a viz mæe.

Sænt braz, nin ra deoc'h hon peden.
Roit deomp nerz, deut d'hon difenn.

Iaouank, c'hoaz, gant eur vam, eun tad,
M'ho kwell dous, vertuzuz ha mad.
D'arr verc'h iaouank roit kalon
Da heuill ann hend mad ha gwirion.

Oh! Triphina, gwella santez,
Skwer vad deuz arr briedelez,
Pedet evit ar priedou,
Laket ho nerz n'ho c'halonou.

Roet d'arr vam nerz ha dousder,
D'ann tad madelez n'hi c'henver;
Græt deze sevel bugale,
Evel doc'h, enn doujans Doue.

Mar ho deuz trubul ha poaniou,
Pedet Doue, deuz ann envou,
Ma vezo gant-he bue vad;
Pell deus-he pep gwall galonad!

Ha c'houi, Trémour, bugel Doue,
D'ann dud iaouank, d'arr vugale,
Roet ho vertuz, ho kalon,
Da vezan kristenien gwirion.

Græt ma vezint madelezuz
Enn kenver ho zud ha Jezuz,
Skuillet voarneze pep benoz,
Ho diwaled bemde, bep noz!

Klevet, Trémour, mignon Jezuz,
Klevet mouez eur vam ankeniuz :

Ma bugelik paour, emezi,
Petra v'ho pa deï da greski?

Triphina, gant ho pugel mad,
C'houi rei dezan, bepred, eur-vad,
C'houi a rei ma v'ho gwir Breton,
Den a feiz ha den a galon.

Voar arr bugel heb mam na tad,
Tolet, m'ho ped, ho taoulagad,
Voar ann intanvez enn daërou,
Ha voar arr paour enn he boaniou.

Triphina, gweled hon glac'har ;
Ar vocen so deut d'hon diskar ! (1)
Gant Jesuz deoc'h nin lavaro :
Pellaït eur c'halizr ken c'houëro !

D'ann dud kenta deuz arr vrô-ma,
Hon nerz, hon sicour arr brassan,
Santez mad, bugel biniget,
De-z-he roet evurusted.

Pa deï deomp ann eur da vervel,
Deut, santez ker, gant ho pugel,
D'hon c'hlask oll, gant hon fastor mad,
Da weled gloar Doue hon tad ! — Amen.



(1) Ar c'holera n'euz græt mervel kalz deuz arr barous, err bloa 1866.



BUE SANTEZ TRIPHINA

HA

SANT TRÉMEUR

HI BUGEL.

Voar donn ar c'hantik.

I.

Tostaïd, tud mad a Vreiz-Izel,
Da glevet eur vue santel,
Bue Triphina, groeg nerzuz,
Bue Trémeur, den vertuzuz.

Triphina mam, Trémeur bugel,
Ho daou ganet enn Breiz-Izel,
A rei, n'eur glevet ho bue,
Deomp oll karet, gwelloc'h, Doue.

Santez Triphina so ganet
Ebarz ann eskopti Gwened.
Hi zad Gwerok, prins gallouduz,
A voa den mad ha vertuzuz.

Enn eur skoll ken kaër ha ken mad,
Arr verc'h a deue da greskad
Enn gened, enn diskadurez,
Enn doujans Doue, enn furnez.

Mez etall Gwerok a veve
Ar prins Komor, den didrue,
Komor, spont euz oll dud ar vro,
Den a dorfet, den a varo.

Ar prins fall a nevoa lazet
He oll groage dougérésed ;
Rak meurbet braz voa he gréden
Enn falz lavar he sorzérien.

« Komor, émezè, diwaled,
Gant ho mab c'houi vezo lazet ;
Na dimézet biken da verc'h ;
Rak c'houi nevo keùn bràz voarlerc'h. »

Koulscoudé, n'eur wèled, eun dé,
Santez Triphina, voar balé,
Komor a n'euz bet lavaret :
« Triphina, c'houi v'ho din pried. »

Gwerok, d'eunn hévélep goulén,
A n'euz spont braz, a n'euz anken.
« Penoz rei ma merc'h, émèzan,
D'ar fallan den deuz ar vro man ! »

Komor, deuz he dû, n'euz galvet
Sant Weltaz (1), gant Gwerok karet.
Dre arr sant a nevoa fé vad
Da drec'hi voar galon ann tad.

Sant Weltaz, rak aoùn a vrézel
Etré tud ken braz hac huel,
A deûaz oll d'ho ûnani,
N'eur ober d'ar verc'h dimézi.

Gant joa vraz eo græt ann eured,
Ha Komor, leùn a joausted,
A gass gantan he vreg santel
Evit chom dalc'h mad n'hé gastel.

Mèz, ô merc'h vad, pebez glac'har!
Heb dale Komor, prins digar,
Elec'h he garanté kenta,
A n'euz poan d'ho kweled brema.

Gweled a ra, na v'ho ket pell,
E tléed kavet eur bugel;
Ha falz lavar arr sorcérez
A ro dezan tristidigez.

Pellaït, merc'hik paour, ha hasted
Da vont da dy ho tad karet ;
Rak laket a n'euz n'hé galon
Da rei ar maro d'hé itroun.

II.

« O ma Doué mad, émèzi,
Pebez den fall, pebez den kri !

(1) Gildas.

Petra, Komor, a m'euz mé græt ?
Siouaz ! ré a m'euz ho karet !

» Va matez vad, Yvona ger,
Hastomp, na gollomp ket amzer ;
Dalc'hed mad ma c'hasek véleñn,
Arc'hoaz, arok deiz, err saôunenn. »

Goudé, pa deuz græt hi heurjou,
Daoulinet, n'eur skuillan daërou,
A ra hi féden da Jésuz
Hac hi c'hlemou ken truézuz :

« O va Doué, ô va Salver !
Pebez rustoni em c'henver !
Nin, groagé paour, so, peurvuian,
Karget a boaniou, err bed-man.

» Na c'houlennan ket, koulscoudé,
N'em glemm deus eoc'h, ô va Doué !
Rak, mé gred, c'houi a rei pep tra
Evit gloar ha mad Triphina.

» Eur c'hraz hebken a c'houlenna :
Græt d'am fried, eunn deiz, gwela
Voar hé dorfejou ken spontuz ;
Truéz voarné-z-han, va Jésuz !

» D'arr groagé paour, enn ho foaniou,
Gwall-gaset gant ho friejou,
Roet, m'ho ped, nerz ha dousder
D'ho lakad mad enn ho c'henver.

» Enn hano ar bugélik mad
A dougan gant gwall galonad,

Roet grasou d'ar vugalé,
Pa deüent da weled hé vé.

• D'ann dud paour hac emzivaded,
D'ann dud enn poan, d'ann dud nec'het,
Roet bépret kalon nerzuz ;
Græt voarn-hé eur sell truezuz. •

III.

Neuzé, heb trouz hi deuz savet...
Komor, n'hé wélé, voa kousket ;
Hac er mèz, voar lein hi c'hasek,
E kerz da Wened, n'eur redek.

Komor, d'arr beuré, n'eur sevel,
Gant kounar hac eur vouéz huel,
A n'euz goulennet, dreïst pep tra :
« Pelec'h, pelec'h eo Triphina ? »

A boan a n'euz peurachuet,
Ha voar hé varc'h a n'euz rédet ;
Triphina, n'alli mui tec'hel !
Triphina, red a vo mervel !...

Netra na drec'h voar an denn kri,
Nag hi daouarn junted gant-hi,
Nac hi c'homjou kên glac'haruz,
Nac hi sellou kên truezuz.

Evelt eur bleï gant eunn danvad,
E tifreûz hi blêw, hi dillad,
Ha gant eunn tôll deus hé glévé
A lemm d'ar vrég paour hi bué.

Triphina, beuziet enn hi goad,
So dilézet enn kreïz eur c'hoad ;

Hi fenn so deuz-hi distaget...
Æléz Doué, deut d'hi miret !

IV.

Voarlerc'h hé dorfet, ann denn fall,
A red, gant hast, ann eür iùdal,
Da Gastel-Finâns, hé balæz,
Savet etall goaz vraz Blaouéz.

Arr vévélien n'euz lavaret,
Pa wêlont hé glévé ruïet :
« Hon mæstrez ker a so maro!...
Ah ! pébez koll evit ar vro!... »

» Triphina, princez arr gwéllan,
N'allimp ket traoualc'h, deoc'h, gwéllan!...
Deomp, na véomp ket divézad,
Da dougen ar c'hélo d'hi zâd.

Ann tâd, n'eur glévet hi maro,
A skuill daërou stang ha c'houëro.
« Triphina, ma merc'h arr gwéllan,
Pébez glac'har din-mé, bréman ! »

Hac ar c'horf, gant Gwêrok hi zâd,
A so douget gant kalz a stâd,
Enn hé bâlæz, gant hénor brâz,
Da d'hortoz hé vignon Gwéltâz.

Ractal é réd d'ann abbati,
E komz d'arr sant, n'eur hirvoudi.
Gwéltâz, n'eur wéled hé vignon,
A ro dézan nerz ha kâlon :

« Gwérok, Gwérok, ma mignon mât,
Laket termen d'ho kalonad...
Doue a deï da denna gloâr
Deuz tôrfet eur prins ken digâr. »

V.

Arr sant na goll ket ann amzer ;
Mont a ra béték arr mûntrer ;
Mèz klozet éo dézan ann orr
Dré gourc'hémen ar prins Komor.

Sant Gwêltaz, pa n'euz bet gwéled
Arr c'hoânt fall deuz ann den kollet,
A n'euz græt ann dro d'arr c'hastel,
N'eur gomz d'arr prins a vouéz huel.

Pa wêll na neo ket chilaouet,
Ractâl arr sant n'euz daoulinet,
Ha n'eur doll eunn dornad douâr,
Ar sant d'ar péc'her a lavar :

« Malôz d'ann den treïtour d'he gir !
Malôz d'ar galon c'houarn ha dir !
Malôz da vûntrer Triphinâ !
Na nevo ken eur-vad na joâ. »

A boan ar sant a n'euz komzet,
Ractal ar c'hâstel n'euz straket.
Komor, blonsed gant ann toliou,
A red, pell, dreïst d'ar ménéïou.

VI.

Goudé kément-ma, sant Weltaz
Da gastel Gwérok a rédaz,

Da gambr Triphina dibennet,
Voar eur gwélé kaër astennet.

Voar hé daoulin, n'eur hirvoudi,
A ped ann oll bobl da bedi,
Hac a lak arr penn voar he skoà,
N'eur gomz gant nerz dez Triphinâ :

« Ma merc'hik ker, ô ma bugel !
Enn hano d'ann Drindet santel,
Tad, Map, Spéred glânn, eûnn Doué,
Had kémeret, c'hoaz ar vué !... »

Kaër a voa da wéled, neusé,
Gwérok, évelt enn eûnn hunvré,
Ha Triphina, voar hi daoulinn,
O laret gant eur vouéz sklintinn :

« O Doué! pegen évuruz
A n'em gavenn gant ma Jésus !
Mèz, d'ho mouéz, ma zad biniget,
Ma iné d'am c'horf n'euz nijet.

» Eur c'hraz bréma, ô ma zad mād :
Græt ma chomin généoc'h, dalc'h mād.
Mé bédo Doué, noz ha dé,
Da hortoz termenn ma bué.

» — Biskoaz manac'h, émê ar sant,
N'euz bévet gant merc'h, n'eur goûant.
Chomet gant ho tad, n'hé gastel,
Da hortoz kavet ho pugel. »

VII.

Benn eun neubed amzer, goudé,
Triphina bed ann den Doué
Da vadezi, da vinigan
Eur bugelik deuz ar c'haëran.

« Trémour, émêzan, v'ho hanvet,
Hac em c'houant a vo zavet ;
Trémour a vo den vertuzuz,
Trémour a vo mignon Jêzuz. »

Arr bugel a drémenn pemp bloa
Enn kichen hé vam Triphina ;
Neuzé, n'eur wëlan, arr vam vâd,
Evit pell, a deu d'enn kuitâd.

Enn eur gouant léanésed
Ractal hi deuz a n'em dennet,
Enn eur c'horn étall goaz Blouavez ;
Eno a vevé gant furnez.

VIII.

Triphina, merzêrez gwiriôn,
C'houi a névo c'hoaz poan galôn ;
Rak Komor, ann den kounâret,
A glask ho pugel biniget.

Kavet a ra, n'eur lec'h distrô,
Arr bugel a glaske pell sô,
Ha, gant eunn tôll, ann tad digâr
A string hé benn voar ann douâr.

Mèz, ô burzud a beurz Doué!
Trémeur dibennet a gerzé ;
Voar hé daouarn é toug hé benn,
Bétek hé vam leùn a anken.

A boan ar sant n'euz diredet
Enn kichen hé vam glac'haret,
E kouez maro voar ann douâr,
Hac he iné a nij d'ar gloâr.

Triphina, gant eur glac'har brâz,
Voar gorf hi map a lavarâz :
« Gloar, ma Doué, gloar d'arr merzer !
Pardoûn, ma Jéruz, d'arr muntret ! »

Eûnn neubed, goudé, Triphinâ
A varv, enn peoc'h, gant kalz a joa.
Laket int ho daou enn eur bé,
Ann eil enn kichen égilé.

IX.

Breiziz, ma breuder, pa gersed
Voar hend Santez-Anna Gwénéed,
N'eur drémenn enn kichen Blaouez,
C'houi gavo roudou arr santez.

Enn Sant-Inann, c'houi hell gwéled
Eur méné dez a goad karget ;
Err lec'h-sé n'em gaw eur feûnten :
Enô Triphinâ rê péden.

Enn Laniskad a wéler, c'hoâz,
Chapell ha feûnteun sant Gweltâz :

Eno Triphina c'houlenne,
Digant ar sant, nerz d'hi c'hine.

Nin ho sâlad, gant lévénéz,
Douar Triphina, goaz Blaouez,
Lanéyer, koajou biniget ;
Hon sænt koz n'euz voarnoc'h kersed.

Aman, liez, nin daoulino...
Gant avel, kann êwned hon bro,
Nin deï, d'ûnani hon pédênn...
Ha c'houi deï, sænt mad, d'hon difênn...

Amen !

Gloar da Zoue ha d'ar Verc'hez !...

Jⁿ-L^{is} R.....,
Belec.

(Propriété.)

